

# MA BOTOU KOAD !!



coll. of Phil. Lips

Ma mam he deus frenet d'in me, lan-di-ra-di  
 re. re, eur c'haer a vo-tou koad neverz  
 Pandi ra di-re re Ha zli-fa-dur ken bras  
 ne re-as d'in tis-koaz 'vel he deus graet e-no,  
 lan-di-ra-di ré no !

<sup>II</sup>  
 - Vit gwir, botou koad 'vel mare  
 N'o c'haer ket e pep mare:  
 O diou hep faout na gwar  
 Ez int par  
 'Vel diou c'hoar  
 Hag aes d'an treid m'ar zo.

<sup>III</sup>  
 D'in ma mamm-goz a lavare:  
 "Gboue amzer hevenoc  
 Eus Creger da Wencol  
 Hamm, neus ket  
 Bet gwelet  
 Botou koad 'Key-faroc'?

<sup>IV</sup>  
 Botou l'er an Aotrou Kure,  
 Zo mat anvalc'h, o ma Doue,  
 Met ar paour kaez pa dreuz  
 An hent kleuz,  
 Hag a reuz!  
 Eun deiz, sur, e sac'ho.

<sup>V</sup>  
 Raok mowel tre ma bugale  
 E lodennin holl ma leve  
 Holl ma zamm-peardra  
 Met, o ya!  
 Ho! la la!  
 Ma botou-me viro.

<sup>VI</sup>  
 Pa vin distennet 'barz ma be  
 Mac'hoanta-lusifer neuze  
 Am c'has gantan d'e di  
 Da d'evi  
 War e fri  
 Ma botez a dapo.

<sup>VII</sup>  
 Sant Per, o welout kement  
 Moarvat, a zigoro d'in me,  
 Ha gant ma botou koad  
 Leun a stad  
 Ma zud vat  
 En henr me a lampo.

